

16 – Er paotr divroet, chantée par Maximin Evano de Bubry.

Yauouank e oen én amzér-sé, mem bleü e oé melén
Deit on de vout koh a-houdé ha men diùhar e grén

Yauouank e oen én amzér-sé ha me 'garé mem bro
Ha bleuein e hré me halon pe sellen tro-ha-tro

Doh mem bro kaer a pe sellen, me halon e vleué
Hag a pe gleüen ur sonenn, men goed peur e verué

É men diùhar, é men goehiad, krogein e hré en tan
Pe gleüen bombard ha binieu, pétremant ur poz-kan

Allas aveit gounid mem bouéd, ret é kuitaat er vro
Ha chetu mé dén divroet é laret kénavo

En dud fur en des bet laret : « Fall pé mat é er vro
Mes ér léh-man 'h oh bet ganet, hui e glaskei distro »

Nag un tarh-kalon em es bet 'h arriü é me hartér
Ne gavan mui na prad na park, n'anaüan ket me hér

Torret é bet en derüad bras hag en alé koed faü
'Men mont breman de zishéoliat pé de zistaü er glaü

'Men 'ma oeit er harhad keneu léh mah èmp de guhet
Yannig ha mé, d'er sul d'enderü, én ur gouarn er loned

Mechal pesort barrad amanü pé péh krén-douar spontus
En des bet eilpennet kavell me yauouankiz eurus

Ya kréinein e hré men diùhar é-raok gwélet me hér
Me halon 'grén bremen eüé ha me fenn zo ponnér

Cette chanson évoque le déchirement de ceux qui ont quitté la Bretagne pour aller gagner leur vie ailleurs : au regret de quitter en pleine jeunesse un pays enchanté, s'est ajouté celui de ne plus le reconnaître au retour, tant son paysage avait changé.

17 – Pe oen-mé bihan-bihanik, mélodie chantée par Anicet Le Floc'h de Bubry.

Pe oen-mé bihan-bihanik
'Oüian ket, 'gredan ket, mars' alken
Pe oen-mé bihan-bihanik, 'gredan ket

Me zad, me mamm, m' gwiské propik
'Eit mont d'er lann get en deve
Nend é ket d'er lann ou hasen
É bord en hent-bras ou laosken
M'ou laoské é bord en hent-bras
Léh m'é pasé tuchentil vras
Léh m'é pasé tuchentiled
Er ré àr varh, er ré àr droed
Er ré àr varh me saludé
Er ré àr droed me arresté
« Eutru, laosket-mé de basein
Me 'gleü me mamm é huchal dein
Monet d'er gér de zimézein
Monet d'er gér, monet fonnapi
Monet de zimézein d'ur braü
D'er braüan paotr ag er hartér